


An dañserien-noz - 1

Ur wech e oa un itron pinvik o chom en ur c'hastell kaer ha 'deva ur verc'h hag ul lezverc'h. He merc'h, anvet Katell, a oa vil, lous ha drouk. He lezverc'h, anvet Janed, a oa koant, fur ha mat. Ne gare ket 'met he merc'h Katell hag e roe dezhi kement tra a c'hoantae, dilhad kaer ha traoù all. Ha kas 'deva deus Janedig paour, a vije gwisket evel ur vatezh.

E koad ar c'hastell e oa ur chapel gozh, lec'h ma vije traoù an noz. Bep noz e teue ur beleg marv da lâret e oferenn. Meur a hini a lâre bezañ gwelet sklêrijenn er chapel, da hanternoz, ha klevet ha gwelet traoù spontus. Den ebet na grede tostaat eno, ur wech ma vije deut an noz.

Ur c'hroashent a oa ivez da dremen evit mont d'ar chapel, lec'h ma vije gwelet alies an dañserien-noz. Den ebet na c'hoantae kavet ar baotred-se, ur wech ma vije kuzhet an heol.

Al lezvamm digalon a glaske an tu da 'non dizober deus Janed, evit ma teuje tout ar madoù, he reoù ha reoù he den diwezhañ, d'he merc'h Katell. Ma soñjas kas anezhi d'ar chapel en kreiz an noz.



An dañserien-noz - 2

Ur sul da noz, goude bezañ chomet pell amzer e-tal an tan da glevet gwerzioù ha kontadennoù, e lâras an itron evel-se :

- Sell 'ta ! Ankouaet 'meus ma levr oferenn er chapel. Ezhomm 'meus diontañ evit lenn ma fedennoù a-raok mont da gousket. Ket da gerc'hat anezhañ din, Janed.

- Ma ! Mamm, a lâras ar plac'hig, hag e savas evit mont. Met aon 'deva un tamm hag e c'houlennas :

- Dont a rey Godig ar vatezh ganin ivez ?

- N'ey ket, n'ey ket, ho-unan 'h efet. Ur plac'h yaouank eveltoc'h, bezañ ken aonik ! N'ho peus ket a vech ?

Mont a reas neuze. Ur c'hi bihan, anvet Fidelig, hag a heuilhe anezhi dre-holl, a redas war he lerc'h. Met Katell a savas kenkent, a serras an nor hag a roas dezhañ un taol troad. Ar c'hi a dorras ur werenn hag a lampas dre ar prenestr 'ba ar porzh.

Janed 'deve joa vras deus ar c'hi Fidelig ha na 'deve ket kement a aon. Al loar a oa sklaer. Pa degouezhas er c'hroashent e welas eno seizh denig bihan, seizh kornandon, o tañsal en kelc'h en ur ganañ. Ma chomas en he sav da sellet dionte, hep krediñ mont pelloc'h. Met an dañserien a dostaas dezhi, kenkent ha ma weljont anezhi, hag e tapjont anezhi en o c'hreiz. Ha setu-int da lâret :

- Dañset ganimp, plac'hig ! Dañset ganimp ! Dañset ganimp !...

- Ya 'vat, emezi, ma ra kement-se plijadur dac'h. Hag e krogas en dorn daou gornandon, ha setu-int da dreiñ ha da ganañ washoc'h evit biskoazh. Ha pa 'deve dañset ha kanet evel-se ur pennad e lâras ar c'hornandon a oa krog e dorn dehou Janed :

- O ! Pegen koant ar plac'hig !

- Un hanter koantoc'h ! a lâras an eil.

- O ! Pegen fur ar plac'hig ! a lâras an drivet.

- Un hanter furoc'h ! a lâras ar bevarvet.

- O ! Pegen kaer ar plac'hig ! a lâras ar bempvet.

- Un hanter kaeroc'h ! eme ar c'hwec'hvet.

- Kaer evel ar stered ! a lâras ar seizhvet.

Hag e rojont bep a bok d'ar plac'hig hag e laoskjont anezhi da vont.

Janed 'h eas neuze d'ar chapel gozh, he c'hi bihan war he lerc'h. Mann ebet spontus na welas ha na glevas. Kavet a reas levr oferenn he lezvamm war he bank hag e teuas gantañ d'ar gêr, hep ma arrias droug ebet ganti. Met ma oa koant ha kaer a-raok, bremañ e oa kalz koantoc'h ha kaeroc'h.

- Setu aze ho levr mamm, a lâras, o reiñ he levr d'he lezvamm. Met homañ a chomas da sellet dionti, digor he genou ha dilavar. Pa deuas ar gomz dezhi e c'houlennas :

- Petra zo degouezhet dit evit bezañ koant evel ma 'h out ?

- N'eus degouezhet netra din, mamm.

Ne ouie ket e oa koant ha kaer evel ma oa.

- Na 'teus ket gwelet an dañserien-noz 'ba ar c'hroashent ?

- Geo 'vat, mamm, gwelet 'meus anezhe, ha komzet gante ivez.

- Ha na 'deus ket graet droug ebet dit ?

- Nann 'vat, mamm, na 'deus ket graet droug ebet din.

- Ma !... hag 'ba ar chapel, petra 'teus gwelet ha klevet ?

- Na 'meus gwelet na klevet netra ma mamm.

- Ma !... Ket d'ho kwele, prim.



An dañserien-noz - 3

E-pad an noz na reas ket al lezvamm 'met soñjal 'ba ar pezh a oa degouezhet da Janed.

- Mac'hat eo an dañserien-noz 'deus graet se, a lâre enni he-unan. Arc'hoazh goude merenn, 'h in d'ober ur bedenn d'ar chapel, hag e leskin adarre ma levr e-barzh, hag e kasin ma merc'h Katell da gerc'hat anezhañ, pa vo deut an noz.

An deiz-war-lerc'h e lâras d'he merc'h penaos e teuje da vezañ ken koant ha ken kaer ha Janed, ha muioc'h memes, ma karje mont da gerc'hat he levr oferenn 'ba ar chapel. Katell na 'deva ket c'hoant kaer da vont, rak aonik e oa. Koulskoude e lâras mont, dre ar c'hoant 'deva da vezañ ivez koant ha kaer.

Pa sonas unnek eur noz e lâras he mamm dezhi :

- Arri eo poent mont, ma merc'h. Ket 'ta, ha n'ho pet ket aon, n'arrio ket droug ebet dac'h.

Aon 'deva 'vat. Met kement a c'hoant da vezañ koant ha kaer a oa ganti ken e kemeras warni da vont.

- Fidelig a deuio ganin ivez, emezi. Hag e c'helvas anezhañ. Met ar c'hi, e-lec'h tostaat, a 'non guzhe pa c'helve anezhañ. Reiñ a reas dezhañ un taol troad hag e lâras :

- Ma ! Loen fall, na 'meus ket ezhomm diwit. Da betra ?

Ha neuze 'h eas.

Pa degouezhas er c'hroashent e oa adarre ar gornandoned o tañsal hag o kanañ. Ma chomas da sellet dionte. Tostaat a rejont dezhi hag e lârajont :

- Dañsal a rafec'h ganimp, plac'hig ?

- Kaoc'h marc'h ! emezi. Me ? Dañsal gant loened lous eveltoc'h !... Fae eo ganin !

- O ! Pegen vil ar plac'h ! a lâras neuze un dañser.

- Un hanter viloc'h ! eme an eil.

- O ! Pegen sot ar plac'h ! a lâras an drivet.

- Un hanter sotoc'h ! eme ar bevarvet.

- O ! Pegen fall ar plac'h ! a lâras ar bempvet.

- Un hanter falloc'h ! eme ar c'hwec'hvet.

- Ha ma dislonko kaoc'h marc'h bep komz ! a lâras ar seizhvet.

Ha 'h ejont kuit neuze.

Katell a deuas d'ar gêr war gement-se.

Pa welas ar vamm he merc'h ec'h estlammas :

- Ma doue ! Petra zo degouezhet dit ma merc'h ? N'eo ket deut ma levr ganit ?

- Nann ! Ket da gerc'hat anezhañ ma keret.

Hag e tisonkas ur bern kaoc'h marc'h.

- Mil mallozh ! Petra eo kement-mañ ? Na 'teus ket gwelet an dañserien-noz ?

- Geus, gwelet 'meus al loened vil ha lous-se.

Hag e tisonkas ur bern brasoc'h. Ur c'hwezh an diaoul a oa ganti. He fas a oa evel un touseg. Ma oa sot a-raok, bremañ e oa sotoc'h c'hoazh, evel ur porc'hell, ha drouk evel ur giez klañv kounnaret. Pa welas he mamm kement-se e tastumas anezhi en ur gambr lec'h na wele den ebet anezhi, hag e touas 'non veñjiñ spontus war Janed.




An dañserien-noz - 4

Ar vrud deus koantiri ha furnez Janed a oa skuilhet dre ar vro. Dont a rae tud pinvik ha tud galloudus da welet anezhi, ha da c’houlenn anezhi da dimeziñ. Met he lezvamm a lâre dezhe penaos na felle ket da Janed dimeziñ.

Ma teuas ivez un deiz ur priñs yaouank. Plijet a reas kement ar plac’h dezhañ ma c’houlennas anezhi diouzhtu da dimeziñ. An diaoulez kozh a soñjas neuze c’hoari un dro gamm dezhañ : lakaat Katell e-lec’h Janed.

Ar priñs a gasas da Janed a bep sort dilhad kaer, braverioù ha diamantoù. Pa oe degouezhet an deiz laketa evit an eured e teuas un bern priñsed, aotrounez hag itronezed kaer.



An dañserien-noz - 5

An dilhad kaer, ar braverioù hag an diamantoù a oa bet laket tout war gein Katell. Janed kaezh a oa bet dastumet dindan alc’hwez en ur c’houfr bras, evit na welje den ebet anezhi. Ar priñs a oa deut en ur c’harreos alaouret. Ar vamm a bignas e-barzh gant he merc’h, goloet he fenn. Kenkent e oe serret an norjoù warne o-zri, ha ‘non gavet a rejont en deñvalijenn. An hini gozh a lâras d’ar priñs na gomzje ket Janed diontañ, ken e vije deut en-dro deus an iliz, abalamour ma oa abof ha ‘deva aon da lâret ul louegaj bennak.

Setu karreos ar priñs da vont a-raok, d’an daoulamm, hag ur bern tud war-lerc’h. Ha setu ivez ar c’hi bihan Fidelig da redek war-lerc’h ar c’harreos, ha da chilpat : « hepi ! hepi ! hepi ! ».

- Petra a lâr ar c’hi bihan-se ? a c’houlennas ar priñs gant an itron.

- Ba ! Netra, ma mab-kaer, na ‘non nec’het ket gant ken nebeud-se. C’hoant ‘neus da dont ivez ‘ba ar c’harreos mac’hat.

Pa oant o tremen koad ar c’hastell e nijas un evn a-us d’ar c’harreos hag a lâre en e yezh :

Ar goantennig

hag ar vravig

zo ‘ba ar gêr chomet,

‘ba ur c’houfr alc’hwezet

siwazh ! Hag ar genoù kaoc’h-marc’h

eo zo o tont ganac’h !...

- Petra ? Petra a lâr an evnig-se ? a c’houlennas ar priñs, souezhet-bras.

- Netra, netra mab-kaer. Petra ? Gant kan an evned emañ ho penn bremañ ?

- O ! Un dra bennaket zo ha ret eo din goût petra eo.

Lâret a reas d’ar c’hocher derc’hel e gezeg hag e klevas adarre an evnig o kanañ e sonig war ur bod, a-us d’e benn. Neuze e tigoras dorojoù ar c’harreos. Pa welas an dra vil a oa azezet en e gichen e laoskas ur griadenn, evel pa ‘nije kavet un touseg en e wele. Boutañ a reas anezhi er-maez ar c’harreos hag he mamm ivez, hag e huchas :

- ‘maez loened lous ! Naered, touseged ! ‘maez !...

Ha setu Katell vil da c’harmat ha da dislonkañ kaoc’h marc’h...



Hag ar priñs da vont d'ar c'hastell gant e reoù, ha leskel anezhe o-div war an hent. Ha setu-eñ da vale dre-holl dre ar c'hastell, ha da grial :

- Janed ! Ma Janedig kaezh, pelec'h 'h oc'h ?

- Amañ 'h on ! a lâras en he c'houfr.

Ur vouc'hal a gemeras ar priñs hag e torras ar c'houfr hag e tennas anezhi er-maez. Neuze e lâras dezhi krapat en e garreos hag e kasas anezhi gantañ da balez e dad, hag ar c'hi bihan Fidelig a deuas gante ivez.

Ma oent neuze euredet, hag e oe gouelioù, ha c'hoarioù, ha festoù deus ar c'haerrañ.

kontadenn dastumet gant Fañch An Uhel.

Trugarez da Malo ar Menn ha da TES evit an tresadennoù.